

LEVRIOU AR VUGALE

KROC'HEN
AZEN

14

AL LIAMM

1961

Al lemaoeg
Riwal. Siegfried
9. 5. 1970

KROC'HEN AZEN



HERVEZ PERRAULT

Testenn vrezhonek al levr-mañ a
zo diwar dorn PER DENEZ

★

Ur wech e oa ur roue hag en doa ur wreg koant ha fur, ur verc'h sentus, hag ur vro eus ar re binvidikañ : evurus-tre e oa. Laouen e oa an holl en e balez, e vinistred a oa onest, e vevelien troet d' al labour, hag en e varchosi en doa kezeg eus ar re gaerañ. Met n' eo ket an dra-se a oa ar souezhusañ-holl : en e balez en doa un azen burzhudus. Al loen-se, e-lec'h ober teil evel ar re all, a rae pezhioù aour. Hag evel-se, diouzh ar mintin, n' eo ket dideilañ dindanañ a veze graet, met dastum ar binvidigezh a oa bet berniet e-pad an noz.

★



Siwazh, siwazh, n' eus den hag a ve morse evurus da vat ha da viken. Ar rouanez, ken koant ha ken fur, a gouezhas klañv, ha medisin ebet ne c'hellas pareañ anezhi. Ha hi, o kompren e oa tost da vervel, a c'halvas ar roue, he gwaz, d' he c'haout.

« Pa vin marv, » emezi, « e vo goulennet ganeoc'h dimeziñ buan en-dro, evit kaout ur mab da vezañ roue, diwezhatoc'h, war ho lerc'h. »

Leñvañ a reas ar roue o klevout kement-se, ha touiñ a reas na zimezje biken en-dro.

« Neuze, » eme ar rouanez, « e vo ret deoc'h lakaat ho merc'h da zimeziñ. Ha hi, plac'hig paour, a gouezho marteze gant ur priñs a vo chalet muioc'h gant hec'h arc'hant eget ganti hec'h-unan. Ha morse ne vo evurus gantañ evel n' on bet me ganeoc'h. »


« An dra-se a c'hell c'hoarvezout, » a lavaras ar roue.

« Ma, da ziwall na zimezfe va merc'h gant unan fall, em boa divizet kement-mañ : reiñ anezhi hepken da unan a garo anezhi dreist pep tra. »

« An dra-se 'vefe mat, » eme ar roue. « Met penaos gouzout ? »

« Netra aesoc'h : an hini a gouezho klañv, hep bezañ gouest da bareañ, goude klevout na c'hell ket dimeziñ ganti, hennezh a garo anezhi muioc'h eget pep tra — muioc'h egetañ e-unan. »

Lavarout a reas ar roue e talc'hfe soñj eus komzoù e wreg. Mervel a reas ar rouanez neuze, ha ken glac'haret e voe ar roue, he gwaz, ma voe soñjet e varvje, eñ ivez.



Un deiz, avat, e teuas tud uhel d' e gaout :
ret e oa dezhañ dimeziñ, pe neuze lakaat e
verc'h da zimeziñ. Respont a reas ar roue na
germerje-eñ gwreg all ebet biken, met ez asante
ober d' e verc'h dimeziñ : prest e oa da zegemer
an holl briñsed a oa e karantez ganti.

Kerkent ha klevet ar c'heloù e teredas tud
yaouank niverus da welout ar roue, o lavarout
e oant e karantez vras gant e verc'h. Eñ, avat,
a respontas nann d' an holl. Sebezet e voe e
guzulierien. Ne lavaras ket ar roue, avat, perak
e respontas nann evel-se : gortoz a rae unan eus
ar briñsed da gouezhañ klañv gant ar garantez,
a-benn reiñ dezhañ e verc'h. Met kaer en doa
gortoz, priñs ebet ne seblante mont gwashoc'h
e yec'hed.

Un dra a oa c'hoarvezet avat : klevet e oa
bet komzoù ar rouanez gant ur mevel kozh a
oa dindan ar prenestr d' an ampoent, o tont eus
ar marchosi. Kamm e oa ar mevel, luch ha
kofek, met ne zisoñjas ket ar pezh en doa
klevet, ha pa voe gouezet e oa ar roue o vont
da zimeziñ e verc'h, e chomas en e wele, oc'h
ober van da vezañ klañv. A-benn ar fin e
klevas ar roue e oa un den o vervel gant ar
garantez evit e verc'h hag, evel m' en doa
prometet d' e wreg, e lavaras d' ar briñsez
dimeziñ gantañ.



Kaer he doe ar plac'h yaouank leñvañ ha yudal, ne fellas d' ar roue klevout netra : dibleg e chomas, o lavarout ne oa den gwelloc'h er bed eget mevel ar marchosi. Ken e pignas ar verc'h yaouank en he c'harroñs bihan da vont da welout Boudig al Lireu ha da c'houlenn kuzul ganti.

« Aes eo deoc'h chom hep dimeziñ gant an den vil-se, hag ivez chom hep disentiñ ouzh ho tad : goulennit gantañ, da gentañ, lakaat ober deoc'h ur sae liv an amzer. Biken ne zeuio a-benn. »

Se a reas ar briñsez ha diouzhtu e c'halvas ar roue ar vicherourien ampartañ da ober ur sae liv an amzer. Ha brav e labourjont : ar sae a oa ken glas hag an oabl pa vez koumoul aour en e greiz.

Gwall-nec'het e voe ar plac'h yaouank, met war guzul ar Voudig, e c'houlennas neuze ur sae liv al loar. Hag ar vicherourien da labourat adarre, ha d' ober ur sae, gwenn ha skedus evel al loar en he c'hann.


Mantret ar plac'h, e c'houlennas c'hoazh ur sae liv an heol. Lakaat a reas ar roue dastum an holl vein prizius, an holl diamantoù a oa en e gastell, ha kas gwiaderien d' al labour. Ha ken skedus e oa ar sae ma rankas an dud kuzhat o daoulagad gant o dorn pa voe diskouezet dezho.



Ne ouie ket mui ar briñsez yaouank petra ober. Boudig al Lireu a lavaras dezhi goulenn neuze kroc'hen an azen hag a rae aour. Sur-mat ne gredfe ket ar roue lazhañ al loen a zegase dezhañ kement a binvidigezh. Met ne chomas ket ar roue d' en em c'houlenn petra ober : kalz a kare e verc'h, c'hoant bras en doa da welout anezhi evurus, ha diouzhtu e lakaas lazhañ al loen paour. Pa welas ar briñsez kroc'hen gwadek an azen, e stagas da leñvañ spontus.

« Kit kuit diouzhtu, » a lavaras dezhi Boudig al Lireu. « Lakait war ho kein kroc'hen an azen ha tec'hit kuit, den n' hoc'h anavezo. Ha kemerit ganeoc'h ar voestig-mañ : enni ez eus kement tra a zo ezhomm d' en em fichañ. Met it kuit buan : n' hoc'h eus ket ur vunutenn da goll. »





Ha setu ar briñsez, gwisket ganti ar c'hroc'hen, louzet he dremm gant huzil, da vont, dic'houzvez d' an holl, a-hed an hentoù. Klasket e voe he c'havout en-dro, kaset soudarded war he lerc'h, met ken lous e oa, ken divalav da welout, ma ne voe anavezet gant den.

Siwazh, diaes e oa dezhi ivez kavout bod en tiez : bep an amzer e veze roet dezhi un tamm bara sec'h, met ne veze morse asantet reiñ dezhi ur gwele da gousket. A-benn ar fin ez erruas en ur vereuri e-lec'h ma oa ezhomm unan bennak d' ober war-dro ar yer hag ar moc'h. Ken skuizh e oa ar verc'hig paour o vale hag o c'houzañv gant an naon ma asantas ober al labour. Kaset e voe da chom en ul lochenn lous, e-kichen kraou ar moc'h, hag er gegin ne veze roet dezhi nemet ar restachoù da zebriñ.

Pa veze ar verc'hig hec'h unan-penn, avat, e kave plijadur oc'h en em walc'hiñ hag oc'h en em fichañ gant traoù kaer ar Voudig : neuze e teue da vezañ ur briñsez en-dro, hag e oa levez leun he c'halon. Trist e oa, avat, pa ranke tennañ kuit he dilhad kaer, gwiskañ en-dro he c'hroc'hen lous, ha lakaat huzil diouzh ar siminal war he dremm hag he daouarn.

Un deiz ma oa Kroc'hen Azen en he lochennig soul, fichet gant he zraoù kaer, e c'hoarvezas da Vab ar Roue tremen dre aze o chaseal. Chom a reas ar Priñs yaouank da verennañ er vereuri ha, goude-se, ez eas d' ober un droiadig el liorz hag er parkeier. Pa erruas dirak lochenn Kroc'hen Azen, e sellas, den ne oar perak, dre doull an alc'houez. Bamet e chomas pa welas ar plac'h kaer, gwisket skedus, ha ken souezhet e voe ma ne gredas ket ober trouz na skeiñ ouzh an nor.

Distro d' ar vereuri, e c'houlennas ar Priñs piv a oa o chom el lochenn-se. Respontet e voe dezhañ e oa ul loudourennig anvet Kroc'hen Azen, a rae war-dro ar moc'h, ha na selle den outi, ken lous e oa. Ne gomprens mui ar Priñs netra. Met ne voe ket evit kas kuit diwar e spered soñj ar plac'h kaer en doa gwelet ha diouzh an noz e kouezhas klañv gant an derzhienn. Ne c'helle mui ar paotr yaouank debriñ netra, bemdez e teue da vezañ gwanoc'h, ha kaer o doa ar vedisined sellout outañ, ne gavent dezhañ kleñved ebet. Ar rouanez, he mamm, a oa glac'haret-bras, ha klask a rae lakaat anezhañ da zimeziñ gant ur briñsez kaer hag a zegasje dezhañ ar yec'hed en-dro.



« Itron va mamm, » emezañ, « ne garfen ket ober poan deoc'h, na d' am zad ivez. N' em eus ket c'hoant dimeziñ gant priñsez ebet. Ma fell deoc'h ober plijadur din, degasit din hepken da zebrñ ur wastell graet gant Kroc'hen Azen. »

Sebezet e voe ar rouanez, ha goulenn a reas gant unan eus ar c'hastell piv a oa Kroc'hen Azen.

« Ur baourez, lous ha divalav, atav gwisket gant kroc'hen un azen kozh, hag a vez o tiwall ar moc'h er vereuri. »

Petra ne rafe ket ur vamm, avat, da saveteiñ he mab ? Goulennet e voe gant Kroc'hen Azen ober ur wastell evit ar Priñs. Mont a reas Kroc'hen Azen d' he lochenn, tennañ kuit he dilhad lous, kribañ he blev melen-aour ha gwiskañ ar sae bravañ he doa : ha gant he daouarn kaer e veskas ar bleud, an amann, al laezh hag ar vioù d' ober ur wastell a vefe an hini wellañ debret biskoazh gant mab ar roue. E-kreiz e lakaas he gwalenn aour. Goude-se e wiskas en-dro he c'hroc'hen azen lous, hag e kasas ar wastell da balez ar Roue.



Kavout a reas ar Priñs ar walenn hag, o c'hervel e dad hag e vamm, e lavaras dezho :

« Itron va mamm, aotrou va zad, c'hwi a fell deoc'h lakaat ac'hanon da zimeziñ. Me zo laouen d' hen ober. Ne gemerin da wreg, avat, nemet an hini a vo gouest da lakaat ar walenn-se war he biz. A-hend-all, e varvin. »

Diskouez a reas dezho ar walenn, ha sur, ken moan e oa na c'helle nemet ur wir briñsez lakaat anezhi.

Embannet e voe neuze gant ar roue e timezfe e vab gant an hini a vefe gouest da lakaat ar walenn, ha priñsezded a zeuas, eus a bep bro, met atav e oa re dev o biz evit mont e-barzh ar walenn. Goude ar priñsezded e teuas merc'hed all, plac'hezded ar c'hastell zoken, ha hini ebet anezho ne oa gouest da lakaat ar walenn.

A-benn ar fin e lavaras Mab ar Roue :

« Daoust ha galvet eo bet Kroc'hen Azen da lakaat ar walenn ? »

C'hoarzhin a reas an holl, ha kaset e voe ur mevel da lavarout da Groc'hen Azen da zont.

Ar plac'h yaouank en em fichas neuze gant he dilhad kaerañ, a daolas warno ar C'hroc'hen Azen lous, hag a yeas da gaout Mab ar Roue.

« C'hwi an hini eo a zo o chom el lochenn e-kichen kraou ar moc'h ? » a c'houlennas ar priñs.

« Ya, aotrou, » a respontas Kroc'hen Azen.

« Lakait ar walenn-mañ neuze. »

Brav ez eas ar walenn dezhi. Neuze e reas ar plac'h yaouank d' ar c'hroc'hen azen kouezhañ diwar he divskoaz ha dirak an holl en em gave neuze en he sav ur briñsez kaer, na oa bet gwelet biskoazh hini ebet kaeroc'h.

« Hounnezh a fell din kaout da wreg, » eme ar priñs.

Ha diouzhtu e teuas e zivjod da vezañ roz en-dro gant liv ar yec'hed.

Graet e voe an eured.



Tad ar briñsez a zeuas. Kontet e voe dezhañ
an istor hag ar mevel kozh en doa klasket
kaout, dre douell, ar briñsez da wreg, a voe
kastizet ha kaset kuit.

Boudig al Lireu a zeuas ivez.

Laouen e oa an holl.

Evurus e voe ar Priñs gant Kroc'hen Azen,
hag evurus e vefent c'hoazh ma ne vefent ket
marv o-daou, pell amzer zo abaoe.





LEVRIOU AR VUGALE

1. PAOTR E VARO GLAS diviet
2. MERC'HIG AR ROZENN diviet
3. AR C'HEMENER BIHAN KALONEK . 1,80
4. ROBINSON KRUSO 1,80
5. ISTOR MEUDIG 1,50
6. AR GOANTENN E KOAD AR C'HOUSK 1,50
7. AR C'HAZH GANT HEUZOU LER .. 1,50
8. LUDUENNIG 1,50
9. KABELLIG RUZ 1,50
10. GWENN-ERCH HAG AR SEIZH
KORRIG 1,50
11. KISTINENN 2,00
12. GWENNIG HA GWENOLA 2,00
13. MOJENNOU 2,00
14. KROC'HEN AZEN 2,00
15. AR C'HAVR HAG HE GIVRI BIHAN .. 2,00

Goulenn al levrioù se digant

P. BODENAN

Verger Saint-Yves, Stang ar C'hoad
KERFEUNTEUN - QUIMPER

C. C. P. 212-23 RENNES

Pep gwir miret strizh gant PER DENEZ

2,00 LN